

## 1.Liberalism, sosialouriezh, doktrin sokial an Iliz

An araokadennoù teknologel hag ekonomikel en oadvezh industriel a gas **chanchamañtoù sokial**.

Ar vourc'hiziezh a dap tamm-ha-tamm levezon ha galloud. Tenniñ a ra he c'halloud ag ar **berc'henniezh prevez** (ar **c'hevala=hollad an argant hag ar mekanikoù evit sevel ha lakaat da vont en-dro un uzin**).

Profitiñ a ra ar vourc'hizien ag ar mennozhioù **liberal**. **Ar liberalism** a c'houlenn nebeutoc'h **a emellerezh ar Stad en ekonomiezh**, ar pezh a laosk ar vicherourien hep difenn. N'emañ ket evit gwelout lezennoù nevez èl bihanaat labour ar vugale da skouer.

Dizingalderioù sokial e oa da vare an oadvezh industriel, kondaonet get ar **sosialouriezh** èl ar prederour **Karl Marx** a c'houlenn an **dispac'h ar broletaerien** evit tenniñ ar **berc'henniezh prevez** hag adlakaat an ingalded.

Evitañ ez eus daou strollad enebour: **ar broletaerien**( micherourien) hag ar **vourc'hizien** a zo **perc'henn àr ar produiñ**(douaroù, uzinoù) **hag an eskemm**(kenwerzh, trañsportoù).

Dirak ar gourdrouz e klask an Iliz get ar pab Leon XIII en **Encyclique**, **Nerum Novarum(les Choses nouvelles)** sioulaat an darempredoù etre ar batroned hag ar vicherourien: anvet eo an doktrin sokial.

## 2. Stuzoù-labour ar vicherourien

Ar batroned a zo mestr àr ar vicherourien: skarzhet e vez ar vicherourien enep pa vez harzoù-labour. Kontroliñ a ra an uzin Schneider ar vicherourien é roiñ d'ar re a vez sentus avantajoù sokial(retred, louzoù).

**Ar stuzoù-labour** a zo start: goproù izel, devezhioù labour hir, lojeiz diyalc'hus, n'eus surentez sokial ebet, n'eus retred ebet, n'eus skol ebet evit bugale ar vicherourien.

Niverusoc'h-niverusañ eo ar vicherourien a-drugarez da lañs an industri e implij ar vicherourien an **harz-labour** evit kaout goproù uheloc'h, ur vuhez get nebeutoc'h a boan. Harpet int get **sindikadoù(ur gevredigezh get ar pal da zifenn interestoù ar vicherourien ha kas o goulennoù da benn-vat)**: aotreet int e 1884 e Frañs get al **Lezenn Waldeck-Rousseau** hag ar sindikad kentañ e voe e **1895** get ar **CGT(Confédération générale du travail)**.

### 3. **An Dispac'h industriel kentañ pe Kemmdro industriel kentañ:ar glaou hag ar mekanik dre aezhenn**

Ur mekanik nevez ijinet e-pad an Dispac'h industriel kentañ Mekanik dre aezhenn get James Watt e Bro Saoz e 1769 :

Energiezh: glaou

Pegoulz: adal 1780 e bro Saoz

Interest: implij glaou a-benn produiñ energiezh

Tachennadoù implijet: er siderurgiezh, metalurgiezh, gwiaderezh, hentoù-houarn

Da gentañ en R-U(Bro Gembre, su Bro Skoz) hag e Frañs (Nord-pas-de-Calais, Le Creusot, tro-dro Lyon, ) Alamagn(Loren ,Saxe,Ruhr, Sarre, Silezia), Belgia

### **An Eil Dispac'h Industriel:**

Energiezh: tredan

Pegoulz: a-dal 1880

Tachennoù: tredan, dir, kimiezh( temzoù el labour-douar) livadoù

E-men : en Alamagn

### **Trede Dispac'h industriel:**

Pegoulz: a-dal 1900

Energiezh: eoul-maen (petrol)

Tachennoù: karr-tan, karr-nij ,

E-men: SUA

Skouer:

Araokadennoù e vez ivez en treuzdougen get ijin ar c'heflusker dre darzh e 1886 : ganet e voe **ar FORD T** krouet get H Ford e SUA e 1908.

Treuzadenn getañ mor Breizh get Bleriot hag ar c'harr-nij e 1909

### **4.Treuzfurmadurioù ar gevredigezh p 138**

Kresk a ra ar boblañs er Stadoù met nebeutoc'h evit ar c'hêrioù ⇒liammet eo get digresk ar varvelezh a-drugarez da aroakadennoù ar yec'hed ha d'ar vedisinerezh (ar vaksin enep droug ar c'hi e 1885 get Pasteur ).

Kreskiñ a ra ivez an dezougenoù en Europa: nebeutoc'h a amzer kollet

Ar spi da vevañ pell a greskas: e 1800 e oa 35 blez hag e 1900 e oa 50 blez.

**Kuitaat a reas an annezidi ar maezioù evit mont e kêr( diavaeziadeg** e vez graet ag ar fenomen-se) en abeg da vekanizadur ar maezioù(traktor) ha labour en industri .

Stumm ar c'hêrioù a gemmas: metro (e Paris e 1900), stalioù bras (le Bon Marché, ar Samaritaine e Frañs); En em vernie ar re nevez degouezhet e karterioù diyec'hedus e bannlevioù reuzeudik. Kudennoù lojeiz, yec'hedoniezh, monedone, felliezh.